

YAN EGILÉ KOLLET HE FEIZ E PARIS

N'anavez ket « Yan-Egilé »
C'hoëskan potr a zo var balé ?
Hennez, avad, a zo eun den !
Hé bar ne gavi birviken.

Yanik a zo bet savet mad
Gand eun tad fur, gand eur vam vad,
N'en deuz gwelet skouër fall ebet,
* Komzo dibren n'en deuz klevet,

Eul labourer deuz ar c'hentan,
Hag eun dorn tuët kaër dehan,
* N'on ket hag hen oa 'n he barrez,
Guelloc'h 'vit-han da botr-skourjez.

Ne ziskaraz biskoaz he gar
Nag er skoassel, nag er c'haillar,
Pac'h e d'an aot, pac'h e d'ar park
Ne zap'he neb lec'h gant he gark.

Bep sul, bep goël, a hed an dé
Gant he offis Yan a vije,

D'abarde, kent ar c'huz-heol mik
Mond d'ar ger a re zioulik.

Ne oa ket potr ar c'hoario,
Na potr an Hostalerio ;

Divar he deod na ruille ket
* Ar mall... ar tlimin... an daonet.

Pa vije goël berz pe zul vraz,
Retret, Jubile, treo-all c'hoaz,
Ne vije ket da zivezan,
Da govez, de gommunian.

Evel-se dre-holl, er c'hanton,
E valee Yan, he ben zon ;
Ha mann, ho pet sonj, da laret
Divar he goust, gand den ebet.

Setu Yanik eat da Bariz,
Aliet gant potret diskuiz ;
Eno 'tisko prim eun doare,

* Ha n'eo ket unan lochoré.

II.

Er ger eo bet 'vit an deio,
Hervez ma toug ar c'heloio,
Da velet he dud, émichans —
— Ne doufen ket var ma c'honsians.

Bleo reud en deuz dindan he fri,
Amploc'h 'vit daou, kément ha tri.
Eun tok fons-hirr zo var he ben
Var he chouk eur goz liviten !

X Kerzet a ra 'vel eur « pipi »
Sort n'arri ket hemde 'n ho ti.
N'eo ket an oll a hall bale
Gant boto moan, guigour en-he.

Silaouet Yan o tispakan
Pézio gallek dişket gant-han :
Gir brezonek na deufe ken
Divar deod potr he « voustachen.

« Kent, 'me-han, ne ouien nitra ;
« Breman 'meuz bet skoll var hep tra,
« E Pariz, du-ze « voyez-vous ;
« Eno ma 'n tol « venez-y tous !

« Ne vo ket torret ho pen d'hech
« Gant beleien ha gand menec'h ;
« Peb hini ra diouz plij d'ehan :
« Var-ze mann da damall outhan.

« Dao d'ehi, eta, dao da Bariz !
« Ne chomet ket azé, Breiziz,
« Da frita laou gant paourenté,
« Da lein, da goan ha da greiste.

« Deut var ma lerc'h hag e velfet
« Goasa bern trec ve dastumet
« E berr amzer ! — Gret evel-d-on
« Ha c'houi vo raktall var an ton —

« Red eo d'eun den kemer he lans
« Da heuill he roll, da glask he chans.
« Ar madou zo stignet var skrap
« D'an holl — An hini dap a dap —

« Deut var ma lerc'h 'n em nec'het ket
« Bézet digoumoul ho speret,
« Ne vanko nitra d'ho kalon,
« Var ma gir, kredet ac'hanon.

X « Diouz ar c'hiz 'po c'hoant e vevfet !
« Kik bemdé, han-goan, mar keret,
« Kouls da wener, kouls da vijel —
« — Neo ket c'houi zo mestr d'ho skudelf

« Neubed a labour, kalz arc'hant,
« Bannac'ho stank a win-ardant,
« Ha plijadur, ha jolori !
« Hag ebat, ha bec'h, ha c'hoari !

« Pa vefet skuiz o gournijal
« Du-ze, du-hont, aman, lec'h all,
« C'houi dei var ho kiz adarzé,
« Da gad ho klud, daoust pe vare.

« Ha ne vo den da grozal d'hech
« Na da zirabansi (1) ganech,
« C'houi zo 'n ho noad, 'n ho liberté,
« Heuillet ho c'hoant, ho karante.

III.

Klevet aze « Zarron » Yanik,
Eat da ganfard deuz a furik,
He damik skiant so treinket
« Danvad ouz bleidi ne bad ket »

O tramaillet ruio Pariz,
Yan 'n euz kollet « feiz hag Iliz »
Dianket eo divar an hent
E heuille var eun diagent.

Eat eo d'otro — n'eo ken breizad —
Fentuz e gav « chupen » he dad !
Ne brisfe biken troc'ha ! an
Diharza stroez, pe sko d'vaelan.

Yan, a oar, avad, C'frézan
Kement giz zo g'animp aman,
Trein kein 'n euz gret da Vreiz, he vro,
He feiz, me gred, a zo marc.

Eur goaz eo da gonta gévier,
Da zorc'henni paour kez « Fanch Kouer »,
« Leun a dolio kaer en deuz gret,
« Souézet eo n'ho hanaver ket.

Allas ! na gredet ket, tué,
« Yanik-pouffer » var he gomzo,
Dei ket mado leiz ho tivrec'h
Nag e Paris, nag e neblec'h

Anez poania, var du pe du,
Dalek zav-heol bete noz d' ;
Duhont, vel aman, neb amser,
« Ne rer lam hirr, gand eur vaz ver »

Me zo gwel ganin, chom duman,
Gant ma gizioù koz da vevan,
'Vit mond d'ar broio krec'h duze,
Da heuill kanfardet dizoue.

N'eo ket a-walc'h « leuskel gant-Jii »
Ha ren he vue disoursi,
Mervel a vo d'ober ive,
Ha bea barnet, goudeze.

Ha pa c'honifen ar bec'h oll
Petra vo-ze, mar g-ar da goll ?
Mado e-leiz, arc'hañt a ver
Ne viront ket dez an ifer n !

Sent deuz ma bro : sant z Anna,
Maudez, Genof, Philom'na,
Mauris, Geltas, Ervoan, Tual
Ma miret da vond da V ro-c'hal,

Ma miret, e Breiz, da Jezuz,
Ma miret d'he vam d' ; uezuz ;
Me fell din mond d' Baradoz
Dre 'n hent a heuill az ma zud koz.

Skivit, 30, a veur z 1897. (M. P. Coquec
Couv. de Penmab. Gauder.)

1) « Zirabansi », da lere z 30 : mistal, grignousal, terri

C'est le même qui signe Jean de
la Grève, dans La Croix des J. C. N.